

Ar Koukouk.

Ar goukoug a zo fin
 A kan deus ar mintin
 E rei tra la
 deri dali da.

Pa vezan em gwele kousket
 Na ne c'hallan ked e c'hlevet

echu e ar goan
 erru eo an an.

Kommanç ra al lapouset kana.
 erru an neve amzer (1)
 En Leon en Kerne en Treguer.

Ma c'hen eum zivertisso
 An dud iaouank e pep kartier.

Me vel erru ar c'houkouk
 Eun taboulin en he goug(1)
 Da annonsi partout
 Ar mad el lec'h an droug.

Peb tra a deu de boent
 Kouls ar blo man evel kent.

Prun raizin a kerez
 Spezard a Kastrillez.

Gregon ha polotrez
 Sivi, luç a pechez,

Kraon, fiez, alamandes,
 Koll, pour, ag ognonnetez.

Saladen kresson, kollindrez (2)
 Kafe, litur, a kassi,
 Gwin Spagn partout dre en allamagn.

Gwin ruz ha gwin gwen
 Peurvia a sao d'ar penn, (3)
 gwin-ardant dan dud iaouank.

En pep tachen, (4)
 Da neum zivertissi
 a da neum rejoissi

Per hag avalou,
 Pa deui ar pardoniu.

Jannton Puil, 9 juin 1851.

(1) Ce vers a été ajouté dans l'interligne, entre le 1er et le 3ème vers.

(2) Kollindrez kaol Indrez.

(3) Ce vers est ajouté dans l'interligne entre le vers 1 et 3.

(4) «En pep tachen» est ajouté dans l'intervalle entre le trait qui sépare les deux strophes et le 1er vers (anc.) de cette strophe.